

G. S. A.

202-188  
juin n° 1

ITRON VARI AR VUB

68



Pedit evidomp.



# CANTIC SPIRITUEL, VAR GLACH'AR AR VERC'HES.

*Var ton Michel Noöletz.*

**J**ESUS ra vezo meulet hac e vam beniguet,  
A zesir a vir galon sicour ar vretonet;  
Revelet-èn e deves da un den dign a feiz  
Scriva ur c hantic nevez da bublia e Breis.

Pa e goelas an den-mâ e voe estonet bras,  
He Map etre e divrec'h goude disgen ar groas,  
E divrec'h hac e bisach a voa rusiet gant goad,  
Ma velas e oll esperanç ur sujet admirabl.

M'em eus qement a druez, emezi ouz an oll,  
Ma gare gallout miret n'en dae den da goll.  
Deuton doc'havertissa, m'oped na vanqit qet,  
Discleria e caran sicour ar bec'herien dallet.

Itron, c'hui so qer caret gant no map diniguet,  
 A qement a c'houlennot ne viot refuset,  
 Ha possubl ve eran qer caout ur sperethumen,  
 Da obteni o reget evit ar bec'herien.

Me a so qen ordinal evel ma red an dour,  
 Oc'houlendigat va map dar bec'herien recours,  
 Hac o veza respontet, me n'o refusan qet,  
 Ne allan qet pardoni da nep ne c'hoanta qet.

Var-se eta christenien preparit ho speret  
 Da receo en ho calon ar c'homsou anoncet  
 A c'henou sacr ar Verc'hes gat true ouzomp-ni,  
 Biscoas ne glevas christen qen truezus hac hi.

Va Jesus leun a drue, permetit gant ho mam,  
 Ma ellin antrepreni e desir gant estlam,  
 Estranch a bep den abil consideri e voues,  
 Gallout gouela a galon ha cana assambles.

Qement den e selaou a bep seurt qalite  
 So crissoc'h evit un tigr hac evit ul leon goue,  
 Ma na ell dont da vouela pa entento e lenn,  
 E ell donet da songeal n'en de qet guir gristen.

Vit an oll assistantet, Rouanes, me ho ped,  
 Contempli ho clac har, ma cassaint ar pec'het;  
 Ma servicho ho taëlou da voelc'hi hon ene,  
 Me zesir a vir galon remission deze.

Qement den a regreto e amser dremenet  
 Hac a guitai e viçou en amser da zonet,

Me assur en devezo remission plenier ;  
 Henvelous ar Vadalen guechal gant hor Salver.

Me garre en guirionez gout ar sujet a se ,  
 M'ho poe qement a c'hlac'har e durant o pue,  
 Biscoas ne voe mam er bed qen truezusa c'hui.  
 Eus ho pers na veritoc'h glac'har ha melconi.

Pa anongas Gabriel e touguen va Doue,  
 Me recevas ur joa vras em c'horf hac em ene ;  
 Mesur feunteun a c'hlac'har em c'halon a savas.  
 Qeit a ma chomis er bed, nep amser ne cessas.

Pa zisclerias Simeon etre ar brofetet  
 E oa deut ar Map-unic da redima ar bed ,  
 Fachet voe ar judevien pa glesjont lavaret  
 E c'hanjen ur c'hrouadur hep goulalan ma  
 guec'hdet.

M'em eus-èn douguet nao mis etre va daou  
 goste .

Qen trist ha qen glacharet injuriet gante  
 Gant qementa nec'haman thacaon eus va bue ;  
 Pa ne vet va c'honductor Joseph am asiste.

Pa dinessas an amser da zonet var ar bed,  
 Me zesire e c'henel en ur plaç preparet ,  
 Mæs Doue a bermetas a ma viont rentet  
 Entre e adversourien er guær a Nazareth.

Da ben un nebeut goude e voan avertisset  
 Ma quitajen ar c'hontre rac ne vije laset ;

Hennes voa an nec'hamant abalamour d'ar  
buguel,

Kancout quitatar c'hartier pe e lacat da vervel.

O Tad leun a drugarez, sellit ho crouadur,  
Hac e vam qer glac'haret o vont en avantur,  
Gant qement a baourente m'ho ped d'o asista:  
Atlas! n'em eus pouvoar nemet gouela outa.

Pa voan aru en Egypt e songen caout repos,  
Mas en nebeut a amser e chansas direpos,  
Herodes a ordrenas elec'h ma commande,  
Ma vije incontinant laset ar vugale.

Ne gafet speret humen a alle discleria  
Ar glac'har am possedas pa glevis qement-mâ  
O tont da gonsideri eo an occasion  
E laser ar vugale evit laza va mignon.

Meurbed ez on estonet o consideri se,  
Ma anduras er bed-ma qement a baourente,  
Qement a voa er bed-ma en devoa oll crouet  
Hac a sentje outa ma vije e souet.

Pabec has hon tad Adame voamp oll ruinet  
Ma tisplichemp da Zoue en devoa or c'hrouet  
Ezajemp oll d'an ifern, den n'en devoa repos  
Sujet voamp da Lucifer, serret voa ar barados

Dre druez ha carantez e ordrenas an Tad  
Da gass ar Speret-Santel da incarni e vap,  
Ar poaniou a verite e oll crouadurien

A zesiras da gouzan herve Doue ha Den.

Pa voa arru an amser a voa determinet,  
E yas gant e zisqibien er jardin Olivet,  
O veza oboissant da volonte e dad,  
Elec'h drouc a veritemp e tesir c'hoas hor mad.

D'ar guener mintingolo e teu Jan da velet,  
Hac en en noas divisqet casi voe trelatet,  
Hac e lavaras : Mari, ema eo ar glac'har,  
Ho mab a so qemeret eguis ur c'hriminal.

Qement ma heulias velet ezon æt d'ar mene,  
Ma fenis disesperi pa ne allen mervel,  
O vont etre daou laëron, ha no anavient qet,  
E oad eguis e groc'hen a voa oll dispennet.

Pa voe divisqa e saë e velan e esqern,  
Neuse e velis c'huesec o sacha gant qerden  
Varedreitacezivrec'h da diout toulou argroas,  
Sur e verit ar pec'her caout punition vras.

Pa voa goroet en noas a enep an amser,  
E soufras injuriou bras etre an daou voler,  
Te a lavaras beza Roue ar Judeanet,  
Ny es laca cabiten etre ar brigantet.

Qent evit ma finissas ne refusas nicun,  
Meritou e bassion d'an oll a voa commun,  
E roas demp da entent ne voa den refuset,  
Digor vezo ar barados bete fin ar bed.

Nemet eis ha triuguentez eo bet seiz mil blas

Ar barados serret o c'hostos qementma ,  
 En a c'houzan evidomp, dezan omp obliget ;  
 Nep a gredo d'e lesen ne vezo qet collet.

Dre verit e bassion. Itron, en hor prenas,  
 Ne reservas nep hini, hon dle oll a baeas,  
 Ha gouscoude pa lennan, e cavan raportet  
 Pazeont eus ar bed-mâ cals a dud so daonet.

Qer bras voa e garante e qever e vugale ,  
 Ma permet da bep hini ober e volonte :  
 N'ellont qet lavaret qeit a ma zint er bed-mâ ,  
 Me so crouet gant Doue evit sujet dezan.

Disqennit, me ho supli, va map demeus ar  
 groas ,  
 Vit m'en ambrassin aman var ar glinoat glas :  
 Emedi er baourente, var an teil eo ganet ,  
 Hac en noaz ez eo maro, hac en noaz enterret.

Mebed Joseph va mignon abers Doue an tad,  
 Da ober ur bez nevez evit lacat va map ,  
 Pa vezo ressuscitet ha na vurmuro den ,  
 Un all ve ressuscitet na ve qet va map ve.

Pa voamp eus anterri neuse e erruas  
 Ar judevien arraget hac a epouvantas ;  
 Ma quitas va mignonet gantspont ouse guelet,  
 Ha ma chomis va unan ep gout pelec'h monet.

Va zat biniguet en ên, hac en a voe biscoas  
 Ur femelen var ar bed a ur glac'har qer bras ,

Chetu me abandonet e menez Calvari ;  
An nos a so o tonet, o pet truez ouzin.

Autrou Doue, va C'hrouer, roit patientet,  
Gant va map pa oa er groas me oe recomandet  
Dezan da veza va map ha me da vam dezan,  
Hac ez oun quietet ganta ha leset va-unan.

Me n'em eus ho quitaet na birviqen na rin,  
Bet oun o pourvea cambr evit ho repui ;  
Qemerit patientet, Mari, na ouelet mui,  
Dont a rai aben tri dez ho map d'o consoli.

Ne voa speret qen parfet n'ic æles en ênvou  
A garre beza er gambr da glêvet ar c'hanvou  
Ara ar vam a drue gant ar glac'har d'e map,  
Cris e ar galon er sonch na defe da dristat.

Me eo an truezussa a voe biscoas er bed,  
Gant an oll oun dispriset, casset, disenoret,  
Eguis un oan egaret etre al leonet,  
Pazon leset gant va map, va zad va sicouret.

Allas! pelec'h ezin-me pa vezo deut an dez ?  
Mui a valiç so ouzin evit a garantez ;  
Mar sortian ne velin nemet an tirantet  
A gare va merzeria, va zad, mar permetet.

Er plaç-mâ oue Mari o ouela nos ha deis  
Hep na dibri nac efa e spaç eus a dri deis,  
O contempli ar boan a verit ar pec'het,  
Truez ous ar bec'herien en amser da zonet.

Pa ressuscitas va mab e teuas d'am guelet,  
 Ha me goulen digantâ pe en lec h e zoc h bet ?  
 O serri pors an ifern va mam eo e teuan,  
 Qement a voa o c'housan ameus lamet a boan.

Cals a dud malin a vo va goude var ar bed,  
 Hac a vo qen efrontet. va mam, da lavaret  
 Pan'en deus nemet ur plag e ret e vemp salvet,  
 A souille ar barados, va mam, gant o fec liet.

Va Salver, me o supli, ha n'am dilesit qet,  
 Recomandet va ene d'hon Tad Crouer ar bed,  
 Ho pezet coun ac hanou er barados ar gloar,  
 Ma vin caret en êvou pa n'en don en douar.

Tri blas varnuguent goude ezeo bet en bue,  
 Da gouragi an ebestel da bublia ar feis,  
 Qement graçou na vertus a zisqen en douar,  
 Adremen dre e daouarn dre vertus e glac'har.

A-het tri blas varnuguent bemde e zê Mari  
 Da saludi croas he vap e menez Calvari,  
 Biscoas n'en em gontantas o veza deiz ha nos,  
 O reqeti ma yase an oll d'ar barados.

Pa gonsideras he map, n'en em gontante qet  
 Da reqeti digantâ quitat poaniou ar bed,  
 E tigassas Gabriel en e gambr eus an ên,  
 Da anonci da Vari pe da heur e varvje.

Pa ho saludis qenta, Mari, me a songe  
 E vije contantamant ha joaiou o pijs,

Nemet glac' hara poaniou goude ves n'eus bet,  
 Ha c'hui ve oboissant da zilesel ar bed?

Evit dilesel ar bed me ne ran qet a gas,  
 O quitat ar gristenien em eus melconi bras,  
 Chom da ouela evito a garen er bed-man,  
 N'en daë den d'an ifern evit anduri poan.

En qeit a ma desire Mari chom var ar bet,  
 Ho map ho car qet parfet a n'a refuso qet,  
 Daouzec blas ha tri-uguent aba zoc'h er bet,  
 Poent eo quitat ar glac' har ha beza consolet,

Va map, me a zesire vise an ebestel  
 Presant ouz ma assista pa rentsen va buez,  
 Va guervel a rent o Mam nac o soulageamant,  
 Ma lesin dezo va c'horf evit va destamant.

An ebestel egaret a bep contre a-bell,  
 A voue souden assemblet voar ur goabren  
 Harentet en un instant ergabr gant miracl bras,  
 Da zonet d'e asista, reservet sant Thomas.

Thomas a oue en Egypt a oue ive rentet  
 Ne oar qet pe e façon er jardin Olivet,  
 Evit gallout rei raport ar myster admirabl  
 Er plaç ma ouela e va stroc'houesi dour a goat.

Dre un inspiration e tisqennas timat  
 Eus ar jardin Olivet e traouyen Josabat,  
 Ma cavas an ebestel hac hi oll glac' haret,  
 O vouela d'o mam Mari e devoa o c'huitet.

Disquezit din, va breuder, ar bez ma oa Mari,  
 Rac me a gred assuret bremâ n'emedi mui,  
 M'em eus-hi anavezet o vont corf ha ene  
 E compagnunez he map, ar sent hac an ælez.

Te, eme Per da Thomas, a so incredulus  
 Na gredas qet e vise ressuscitet Jesus,  
 Pa nevet ma e laqas da douch e bemp gouli,  
 Ha bremâ ne gredes qet eua er bez Mari?

Me o supli permetet ma zigorin ar bez,  
 A neuse me raï deoc'h guelet ar virionez;  
 Pa voa digoret ar bez ne voa netra enna,  
 Nemet al lincel a voa leqet d'e liana.

Nemet Doue ne alle discleria ar glac'har  
 Qement evoent estonet ma coent d'an douar,  
 Ne allent qet caout courach da sevel ac'hane,  
 Qen na visent consolet gant un æl eus an ên.

Pa vo ar varn general va c'halon a ro din  
 N'em eus qet bet var ar bed qement avelconi,  
 Evel am bezo neuse pa glevin ar re daonet  
 O c'houlen ouzin sicour ha me ne allin qet.

Me a gred pa goulennot e caffo agreabl,  
 Ne deus netra impossibl da Jesus-Christ ho  
 map,

N'en deo qet bras mister deoc'h caout se di-  
 gantâ,

Evel ober an douar hac an ên a netra.

Me a requet ous ma map rei pardon deze,  
 Mæs ne vezo nemedon o presec evite:  
 An oll predicatoret, memes an ebestel  
 A vezo sur em enep avocadet contrel.

Va map, gouela a reonhan n'o c'honsolet qet,  
 Me a vouelo evite ma viont consolet,  
 Ma n'oc'h eustruez oute, sellet ho mam Mari  
 So dirac ho majeste qer glac haret hac hi.

Va mam, n'en deo qet me so qiriec d'o gla-  
 c'har,  
 N'o devoa qet meritet pa voant var an douar ;  
 Brassoc'h mister e cassen rei pardon deze,  
 Evit pa grouis ar mor, an douar hac an ên.

Birviqen oc'h nec'hamant ne allac'h va miret,  
 Mar disqennot d'an d'an ife;n na mar bezont  
 daonet,

Abalamour d'an divron en deveus ho læset ;  
 Ho pezet truez oute, n'o c'hondaonet-hi qet.

Me gare em be argalout dazisques ma c'halon,  
 Da requeti digueneoc'h dezo remission,  
 Pa na servich va daëlou, va divron ha va læs,  
 Va map, bras eo ho coler refus ar pec'her qæs.

Va map, it d'ho parados gantar re so salvet,  
 Ha va leset er plaç-mâ evit gouela bepret ;  
 Gant an dour am daoulagat me o guelc'ho qen  
 net,

Dign da vont d'ar barados, n'o c'hondaonet-y  
get.

Ne allent-y get beza netha quitat o fec'het,  
C'hui oar ar viriones ar pez am eus souffret,  
N'em eus netra espernet d'o renta evit poan,  
Mepriset o deus va goat, ret e dezo gouzan.

Hennesvezo an estlam pavezo deutan deiz,  
Qement a vezo presant a garent ne vent get,  
O clevetar map, ar vam n'en em accordont get,  
O songeal en re daonet prest da veza barnet.

Jesus, a c'hui a gare e conessemp a enep,  
Nibor boagret hon dever etre voam var ar bed,  
Ny a gare assuret ne visemp get crouet,  
Da veza control d'ho mam a so qen estlamet.

Mari, pa eo ordrenet, ez eo ret din parlant,  
Ny hor boa-y instruet e teuse ar jugeamant,  
Mar de ny a so manget, ni reget digueneoc'h  
Ha ma vezimp-ni daonet ha chi a vel gueneoc'h.

Jesus, ez omp oll presant, c'hui voar ar vi-  
rionez:

Ny a ziscuese dezo an hent celestiel;  
Ny reget digueneoc'h, mar de ny so manget,  
Ha ma vezont-y salvet, ha ny a vo daonet.

Va mam, a c'hui gred bremâ, men'ho refusan  
get,

Me n'em eus get o c'hrouet evit beza daonet,

An diaoul o deus choaset da conductor deze;  
Chom a raint en ifern entre vezin Doue.

Neven qet urbarner just mar laman digante  
Qement o devoa choaset pá voant en o bue,  
Me varvas en o presang da baea o rançon,  
Hac a ro bremâ deze va malediction.

Songe competa, christenien, er glac'hara Vari,  
Gant truez ous hon ene regetomp diganti  
D'en em viret ous pec'het na vezomp qet qefret  
D'hor mam Mari da ouela ous or guelet daonet.

Itron Vari a druez, entre m'omp en buhez,  
Pedit ar Speret Santel d'hon inspira bemdez  
Da garet ha da servicha ho map gant diligeang,  
Hac en hon heui diveza caout hoc'h asistang.

F I N.

---

E MONTROULÈS,

E ty LÉDAN, Imprimêr ha Librêr.